

OFIS PUBLIK
AR BREZHONEG



OFFICE PUBLIC
**DE LA LANGUE
BRETONNE**

SIFROÙ DISTRO-SKOL AR C'HELENN DIVYEZHEK E 2013


POL STUDI HA DIORREN
ARSELLVA IMPLIJ AR YEZHOU
GWENGOLO 2013

E 2013, evit ar 36^{vet} distro-skol da-heul, e talc'h ar rouedad skolioù d'en em zispakañ ha kresk zo gant sifroù ar c'helenn divyezhek.

9 lec'h nevez zo bet digoret, ar pezh a zo dreist da geidenn ar bloavezhioù 2000 (nebeutoc'h eget 8 lec'h digoret da bep distro-skol, ent keitad, etre 2001 ha 2010). Trement eo pazenn ar 15 000 skoliad divyezhek (15 338 skoliad) gant ur c'hresk par da re 2011 ha 2012.

Digoradurioù


Niver a lec'hioù divyezhek nevez digoret bep bloaz er c'hentañ derez



- **9 lec'h divyezhek zo bet digoret er skolioù-mamm (14 e 2012, 6 e 2011) :**
 - 3 gant an deskadurezh publik : Plouvagor (22), Eliant ha Plouneour-Menez (29).
 - 4 gant an deskadurezh katolik : Brest, an Erge-Vras ha Fouenant (29), Kaodan (56).
 - 2 skol Diwan : Boulvriag (22) ha Felger (35).

- **2 lec'h divyezhek zo bet serret er skolioù-mamm avat :**
 - 1 gant an deskadurezh publik : treuzkas lec'h Benac'h da Louergad (22).
 - 1 skol Diwan : Pornizh (44).


Kinnig kelenn divyezhek er 1^{añ} derez (skolioù-mamm ha skolioù-kentañ)



- **1 lec'h divyezhek nevez zo bet digoret er skolaj gant an deskadurezh publik :**
 - Bear (22).


- **2 lec'h divyezhek zo bet serret er skolaj avat :**
 - 1 gant an deskadurezh publik : Pondi (56).
 - 1 gant an deskadurezh katolik : treuzkas lec'h Gwitalmeze da Lokournan (29).

Kinnig kelenn divyezhek en eil derez (skolajoù ha liseoù)



- **1 vro ha 2 DPKE¹ ouzhpenn** zo ur c'hinnig divyezhek enno : kumuniezh-kumunioù bro Fouenant, bro Felger ha Felger Kumuniezh.

Kinnig kelenn divyezhek dre DPKE e 2013



¹ Diazeadur Publik a Genlabour Etrekumunel (EPCI e galleg).

Sifroù

- **450 lec'h kelenn divyezhek** zo bremañ (hag 1 skol Diwan e Pariz). **207 skolvamm divyezhek** a gonter.
- Da **15 338** e sav an niver a skolidi divyezhek e Breizh :
 - 3 705 skoliad e Diwan (ha 27 e Pariz),
 - 11 633 skoliad en deskadurezh par-ouzh-par : 6 662 er publik ha 4 971 en deskadurezh katolik.

Sifroù ar c'helenn divyezhek eus ar skolvamm d'al lise

	Diwan	% kresk	Publik	% kresk	Katolik	% kresk	Hollad	% kresk
22	688	4,7%	1 259	2,4%	377	-6,9%	2 324	1,4%
29	1 978	1,2%	3 231	10,0%	1 876	6,1%	7 085	6,4%
35	168	8,4%	593	6,3%	411	4,3%	1 172	5,9%
44	334	2,8%	235	0,4%	59	7,3%	628	2,3%
56	537	0,6%	1 344	3,5%	2 248	2,1%	4 129	2,3%
Breizh	3 705	2,2%	6 662	6,5%	4 971	3,0%	15 338	4,3%
Kresk	80		405		147		632	

- **Kreskiñ a ra an niver a skolidi e pep departamant.**
- **Penn-ar-Bed** zo ouzhpenn **7 000 skoliad divyezhek ennañ** bremañ ; an departamant ma kresk ar sifroù ar muiañ e 2013 eo (427 skoliad ouzhpenn, +6,4%).
- **An hentad publik** eo a gresk ar muiañ eus ar skolvamm d'al lise. Kreñvaat a ra e feur kreskiñ bep bloaz abaoe 3 bloaz : **+6,5%** (+5,7% e 2012, +5,6% e 2011). Heverk eo feur emdreiñ ar publik e Penn-ar-Bed dreist-holl : +10%. Kresk an hentad katolik a chom d'al live ma oa warlene (+3%), hini Diwan zo izeloc'h (+2,2% e-skoaz +4,1% warlene).
- **E pep departamant** e kresk sifroù pep hini eus **an 3 hentad war un dro** (nemet evit hentad katolik Aodoù-an-Arvor).


Sifroù ar c'helenn divyezhek er 1^{añ} derez

	Diwan	% kresk	Publik	% kresk	Katolik	% kresk	Hollad	% kresk
22	467	5,7%	1 071	1,5%	357	-6,8%	1 895	0,8%
29	1 257	-0,6%	2 847	9,9%	1 602	7,4%	5 706	6,7%
35	168	8,4%	425	5,7%	388	4,0%	981	5,5%
44	290	4,3%	199	2,6%	59	7,3%	548	4,0%
56	405	-1,0%	1 252	3,6%	2 002	2,3%	3 659	2,3%
Breizh	2 587	1,5%	5 794	6,3%	4 408	3,5%	12 789	4,3%
Kresk	38		343		148		529	

Emdroadurioù an deskadurezh divyezhek


- **Kenderc'hel a ra** an niver a skolidi divyezhek **da greskiñ**. Kresk zo gant pep hentad met merket eo an distro-skol-mañ gant lammgresk an deskadurezh publik dreist-holl.

Emdroadur an 3 hentad




- Chom a ra ar c'hresk d'al live stadet er bloavezhioù diwezhañ (kevatal da hini 2011 ha 2012 ha par da geidenn ar bloavezhioù 2005-2010) : **632 skoliad divyezhek ouzhpenn** zo e 2013.

An niver a skolidi divyezhek ouzhpenn da bep distro-skol




Dasparzh ar c'hresk etre ar c'hresk diavaez hag ar c'hresk diabarzh



- Kreñvoc'h eo ar c'hresk diabarzh eget warlene en abeg d'an digoradurioù niverusoc'h a oa bet e 2012 pergen.
- **Da 4,3%** e sav ar c'hresk hollek. Un tuadur da c'horrekaat zo, hag eñ kompesoc'h etre 2011 ha 2013 eget na oa bet etre 2007 ha 2010. Ha pa vefe e-touez ar feurioù izelañ evit an 10 vloaz diwezhañ, dregantad kresk 2013 a chom tost-tre da hini 2011 ha 2012. Ur sin kalonekaus eo kentoc'h.

Emdroadur kresk ar c'helenn divyezhek



Mammennoù evit ar sifroù : Deskadurezh Stad, Deskadurezh katolik, Diwan Breizh, Ofis Publik ar Brezhoneg.

Stagadennoù

An niver a skolidi divyezhek dre zepartamant ha dre live

	Skolioù-mamm	Skolioù kentañ	Skolajoù	Liseoù	Hollad	Kresk	Feur kreskiñ
Aodoù-an-Arvor	856	1 039	383	46	2 324	32	1,4%
Penn-ar-Bed	2 778	2 928	967	412	7 085	427	6,4%
Il-ha-Gwilen	483	498	138	53	1 172	65	5,9%
Liger-Atlantel	289	259	80		628	14	2,3%
Mor-Bihan	1 814	1 845	426	44	4 129	94	2,3%
Breizh	6 220	6 569	1 994	555	15 338		
Kresk bloaziek	217	312	41	62		632	
Feur kreskiñ	3,6%	5%	2,1%	12,6%			4,3%

■ Kresk ■ Digresk

An niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre live²

	Skolioù-mamm	Skolioù kentañ	Skolajoù	Liseoù	Hollad	Kresk	Feur kreskiñ
Diwan	1 277	1 310	816	302	3 705	80	2,2%
Publik	2 930	2 864	685	183	6 662	405	6,5%
Katolik	2 013	2 395	493	70	4 971	147	3,0%
Hollad	6 220	6 569	1 994	555	15 338		
Kresk	217	312	41	62		632	
Feur kreskiñ	3,6%	5,0%	2,1%	12,6%			4,3%

■ Kresk ■ Digresk

An niver a skolidi divyezhek dre zepartamant ha dre hentad

	Diwan	Publik	Katolik	Hollad	Kresk	Feur kreskiñ
Aodoù-an-Arvor	688	1 259	377	2 324	32	1,4%
Penn-ar-Bed	1 978	3 231	1 876	7 085	427	6,4%
Il-ha-Gwilen	168	593	411	1 172	65	5,9%
Liger-Atlantel	334	235	59	628	14	2,3%
Mor-Bihan	537	1 344	2 248	4 129	94	2,3%
Breizh	3 705	6 662	4 971	15 338		
Kresk	80	405	147		632	
Feur kreskiñ	2,2%	6,5%	3,0%			4,3%

■ Kresk ■ Digresk

² Sifroù evit Breizh ; ur skol Diwan zo e Pariz ivez.

An niver a skolidi divyezhek dre zepartamant, dre hentad ha dre live

Dep.	Hentad	Skolioù-mamm	Skolioù-kentañ	Skolajouù	Liseoù	Hollad dre hentad	Hollad dre zep.
22	Diwan	226	241	221	0	688	2324
	Publik	493	578	142	46	1259	
	Katolik	137	220	20	0	377	
29	Diwan	603	654	419	302	1978	7085
	Publik	1 450	1 397	321	63	3231	
	Katolik	725	877	227	47	1876	
35	Diwan	94	74	0	0	168	1172
	Publik	194	231	115	53	593	
	Katolik	195	193	23	0	411	
44	Diwan	160	130	44	0	334	628
	Publik	94	105	36	0	235	
	Katolik	35	24	0	0	59	
56	Diwan	194	211	132	0	537	4129
	Publik	699	553	71	21	1344	
	Katolik	921	1 081	223	23	2248	

■ Kresk ■ Digresk

Renkadur ar c'humunioù diouzh o skolidi divyezhek (eus ar skol-vamm d'al lise)

Renk	Kumun	Dep.	Lec'h kentañ e	Diwan	Publik	Katolik	Hollad	Kresk
1	Roazhon	35	1977	144	390	156	690	49
2	Gwened	56	1990	210	89	271	570	15
3	Kemper	29	1977	336	146	72	554	0
4	Naoned	44	1978	211	235	59	505	27
5	Karaez-Plougêr	29	1985	382	66	43	491	24
6	Lannuon	22	1978	105	316	28	449	5
7	Brest	29	1978	188	231	23	442	57
8	Plougastell-Daoulaz	29	1995		196	202	398	18
9	Landerne	29	1987	56	245	89	390	15
10	Lanniliz	29	1995		239	145	384	12
11	Lesneven	29	1981	103		181	284	-2
12	Teiz	56	1995		77	167	244	4
13	Oriant (an)	56	1978	94	139		233	0
14	Plijidi	22	1995	221			221	6
15	Releg-Kerhuon (ar)	29	1988	173	45		218	13
16	Langedig	56	2001		56	144	200	-9
17	Gwengamp	22	1981	79	17	101	197	4
18	Henbont	56	1997		30	160	190	25
19	Plabenneg	29	1991	27		143	170	-6
20	Lannarstêr	56	1988		168		168	6
21	Sant-Brieg	22	1979	91	76		167	4
22	Redon	35	1997		61	102	163	-15
23	Lokournan	29	2008	71		87	158	26
24	Logunec'h	56	2003			156	156	10
25	Plunered	56	1998		37	117	154	3
26	Sant-Teve	56	2001		40	113	153	-9
27	Gwiseni	29	1990	106		42	148	6
28	Pondi	56	1984	62	23	62	147	-18
29	Montroulez	29	1988	64	80		144	20
30	Rostrenenn	22	1984		81	59	140	-7

31	Gwitalmeze	29	1977	66		71	137	-3
32	Kemperle	29	1989	74	63		137	22
33	Landivizio	29	2000	6		121	127	-4
34	Kastell-Paol	29	1978	55		66	121	-17
35	Brec'h	56	1989		120		120	10
36	Douarnenez	29	1989		117		117	11
37	Banaleg	29	1982	53	62		115	23
38	Loperc'hed	29	2004		112		112	3
39	Ploveur	29	1993		111		111	1
40	Bruz	35	2003		111		111	11
41	Baod	56	1991	50	58		108	5
42	Bear	22	2007		105		105	23
43	Kleder	29	1991		33	70	103	-19
44	Milizag	29	2006		100		100	8
45	Plougerne	29	1996		100		100	1
46	Sizun	29	2004		100		100	8
47	Plounevez-Moedeg	22	2002	39	59		98	-2
48	Lokoal-Mendon	56	1994			98	98	4
49	Ploue	56	1994		98		98	10
50	Pleuwigner	56	1994			96	96	-6
51	Brieg	29	2006		95		95	17
52	Plouvorn	29	2006			93	93	4
53	Gwidel	56	1991		91		91	-2
54	Kawan	22	1987		90		90	-5
55	Dinan	22	2000	88			88	11
56	Tremeven	29	2005		87		87	11
57	Plouarzhel	29	2006			83	83	1
58	Gwitreg	35	2007			83	83	15
59	Pempoull	22	1984	22	59		81	-8
60	Plistin	22	1999		81		81	-6
61	Surzhur	56	2007			80	80	6
62	Gourin	56	1994		45	34	79	10
63	Gouenoù	29	2004		78		78	-2
64	Plouzane	29	2003		76		76	9
65	Pabu	22	1991		75		75	3
66	Plougonvelen	29	2007		74		74	11
67	Santez-Anna-Wened	56	1994			74	74	0
68	Josilin	56	2003			73	73	7
69	Gwipavaz	29	1995		72		72	7
70	Kommanna	29	1977	71			71	-1
71	Plozeved	29	2007		71		71	1
72	Erge-Vras (an)	29	2002		52	16	68	18
73	Konk-Kerne	29	1999		27	40	67	8
74	Gwiler-Leon	29	2002			66	66	0
75	Kastell-Nevez-ar-Faou	29	2003		66		66	5
76	Lanneur	29	2004		66		66	3
77	Mourieg	56	2000			66	66	0
78	Perwenan	22	1999		64		64	1
79	Gregam	56	1996			63	63	-1
80	Louergad	22	1998		62		62	17
81	Ploueskad	29	1999			62	62	0
82	Pont-'n-Abad	29	1995			60	60	0
83	Alre (an)	56	1999	36		24	60	-19
84	Gwegon	56	2000			60	60	-4
85	Skaer	29	1998		59		59	-2
86	Pleskob	56	2005			58	58	-6

87	Ploneour-Lanwern	29	2009			56	56	9
88	Ploveren	56	2008		54		54	9
89	Rospezh	22	2004			52	52	1
90	Pluverin	56	2005			52	52	9
91	Pont-Skorf	56	2001		52		52	1
92	Plouha	22	2010		51		51	8
93	Rosko	29	2002		50		50	-2
94	Lokmaria-Redon	35	2009			50	50	-1
95	Rianteg	56	2009	50			50	4
96	Pleiber-Krist	29	2008		46		46	6
97	Sant-Ervlan	44	2008	44			44	-3
98	Kewenn	56	2006		42		42	1
99	Begnen	56	2000			41	41	-4
100	Molan	29	2012		40		40	17
101	Klegereg	56	2004			40	40	-1
102	Faou (ar)	29	1998	39			39	6
103	Daoulaz	29	2006		38		38	2
104	Maoron	56	2000		38		38	7
105	Muzilheg	56	2011			37	37	5
106	Gwenrann	44	1999	36			36	8
107	Karnag	56	1992			35	35	6
108	Kistreberzh	56	2000	35			35	0
109	Tregastell	22	1989		34		34	-9
110	Boulvriag	22	2005	10		23	33	6
111	Louaneg	22	2006	33			33	2
112	Sant-Nazer	44	1991	33			33	5
113	Mêl-Karaez	22	2004			32	32	5
114	Tregon	29	1982	32			32	-2
115	Faoued (ar)	56	1993			32	32	0
116	Mêlrant	56	2006			32	32	-2
117	Sarzhav	56	1993		32		32	4
118	Landreger	22	1997			31	31	-23
119	Lokmaria-Plouzane	29	2012			31	31	11
120	Plogastell-Sant-Jermen	29	2010	31			31	3
121	Sant-Riwal	29	1983		31		31	-1
122	Sant-Maloù	35	2000		31		31	-1
123	Bulad-Pestivien	22	2007		29		29	-1
124	Perroz-Gireg	22	2007			29	29	-7
125	Sant-Martin-war-ar-Maez	29	2011		29		29	7
126	Eliant	29	2013		28		28	28
127	Pariz	75	2004	27			27	-26
128	Kraozon	29	1989	24			24	-5
129	Sant-Tegoneg	29	2012		23		23	5
130	Groñvel	22	1998			22	22	0
131	Pleuzal	22	2009		22		22	2
132	Pluguen	29	2012		22		22	8
133	Kastellin	29	2007	21			21	-4
134	Kerien	29	2011		21		21	2
135	Kaodan	56	2013			21	21	21
136	Noal-Pondi	56	2009			21	21	-3
137	Pluergad	56	1996			21	21	-3
138	Sine	56	2011		21		21	6
139	Kastell-Bourc'h	35	2012			20	20	1
140	Ploermael	56	1994		20		20	-5

141	Kallag	22	2012		19		19	3
142	Plouvagor	22	2013		19		19	19
143	Poullaouen	29	2010		18		18	0
144	Plouneour-Menez	29	2013		16		16	16
145	Fouenant	29	2013			14	14	14
146	Felger	35	2013	14			14	14
147	Langoned	56	2012		14		14	-2
148	Magoer	35	2008	10			10	-8
149	Savenneg	44	2009	10			10	-9
	Benac'h	22	1998		0		0	-20
	Pornizh	44	2012	0			0	-14

■ Kresk ■ Digresk

* Lec'h nevez-digoret er gumun da zistro-skol 2013